

Galv mesaer menez Are

D'am nizez vihan, Jann Grall.

An ton-man a zo bet dastumet e Kerne-Uhel. Diés e vije kavout bravoc'h egetan! Savet eo war eur skeul-gan (« gamme » e galleg) koz, a veze graet anezi « skeul-gan Lokrian » gant ar C'hresianed. Ar re-man, en o skridou brudet, o deus lezet ganimp disklêriadur diwar-benn ar « skeul Lokrian », nemet skouer ebet anezi ne anavezet betek-hen. Eun enor eo evit hon Breiz-Izel, a zo bet miret ganti en he yez keltiek hag en he zoniou dispar kaera herez an Amzer-goz, kaout e-kreiz he zensor ar berlezen-man. Ar c'homzou a zo war an ton a zo bet savet gant hon mignon Ivonig Picard. Trugarez d'ezan!

M $\text{♩} = 72$

The musical score consists of five staves of music in treble clef. The first staff is in 4/4 time and contains the lyrics 'O lo le, O lo le, o lo le, o lo'. The second staff continues with 'le O lo breudeur, deut d'am c'hichen'. The third staff has 'O lo le, o lo le, o lo le, o lo'. The fourth staff has 'le Se-laouit va c'hanaouen O lo to'. The fifth staff begins with 'O!' and ends with a double bar line.

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le (1).
O lo, breudeur, deut d'am c'hichen;
O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
Selaouit va c'hanaouen.
O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
Va-unan el lann divuzul,
O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
'Renkan chom pemde ha sul.
O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
En eur welet 'c'h en em astenn,
O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
Askel ar skoul 'us d'am fenn.
O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
Ha klujet ar vran velkonius,
O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
D'am c'halon gwall-ankenius.
O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le.
Er peulder mouez ar gornigell,
O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
A c'hournij 'barz an avel.
O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
E-pad ma seblant va ene
O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
'N em leda war ar mene.
O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
Va-unan el lann divuzul,
O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
'Renkan chom pemde ha sul.
O lo lo. O!

O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
O lo, breudeur, deut d'am c'hichen.
O lo le, o lo le, o lo le, o lo le,
Selaouit va c'hanaouen.
O lo lo. O!

Ivonig PICARD.

Notennet eo an ton eun tammig izel. Ar re a vez ganto moueziou skelletr a hello e uhelaat, dre chenj an noten « re » en noten « la ».

(1) Distagit evel pa ve skrivet e galleg « le ».